

Ebrel/Avril 2011 - niverenn 354 - 4,5 €

bremañ

**GWISKAÑ
FARO**
DILHAD AR VRO

Heol Guy Cotten

Piv e Breizh n'anavez ket ar porpant melen eouliet* a zo ur boulomig warnañ ? Den ebet evel-just. Ken brudet eo merk dilhad Cotten abaoe kazi 50 vloaz, m'eo deuet da vezañ uu darn eus glad sevenadurel Breizh. Un taol kaer evit Guy Cotten ha n'en doa ket soñjet tamm ebet sevel un embregerezh ken bras gant dilhad ken priziet gant martoloded ar bed a-bezh pa oa yaouank. Kontañ ar vuhez dreistordinal-se a ra al levr *Guy Cotten, le soleil sous la pluie*, bet skrivet gant ar c'hazetenner Claude Ollivier. Un digarez eo bet evit kejañ gant paotr-e-borpant-melen, ganet e 1936 e Kermatret, e parrez Sant-Ivi.

Un arouez eus ar vuhez war vor hag en arvor eo deuet porpant Guy Cotten da vezañ. Un doare da skeudenniñ Breizh eo deuet ivez da vezañ tamm-ha-tamm.



Penaos eo ganet ar mennozh da sevel ul levr diwar-benn ho puhez ?

Meur a wech ez eus bet goulennet diganin gant ma bugale, gant ma bugale-vihan ha gant tud tro-dro din skrivañ ma buhezskrid ha morse ne'm eus kavet amzer. Ret eo kavout amzer evit skrivañ ha da'm meno eo diaes a-walc'h ivez skrivañ gant ar c'hentañ gour unan, ha kontañ ma buhez din-me. Erfin ne'm boa ket kavet an tu d'en ober. Setu p'eo bet goulennet gant Claude Ollivier, kazetenner hag a anavezan abaoe pell zo, em eus asantet. Chañs am eus bet rak kalz barrekoc'h egedon eo evit skrivañ hag aet eo kalz buanoc'h ivez eget ar pezh em bije graet ! Deuet eo meur a wech 'ba 'r gêr evit flapañ ganin, enrollañ ha skrivañ a rae pep tra ha tamm-ha-tamm en deus savet al levr.

Plijet oc'h gant an disoc'h ?


Ya, evel-just. Lennet em eus al levr div wech, ar wech kentañ e oa un adlenn labour evit difaziañ traoù zo ma oa ezhomm hag an eil e oa evit ar blijadur nemetken.

Anavezet-mat eo ho tilhad porpant eouliet met a-benn ar fin eo dre zegouezh ho peus krouet an embregerezh Cotten ?

Ya, gwir eo. Ganet on e Sant-Ivi, ma zud a oa labouerien-douar. Ar genskoazell a zo etre an dud war ar maez a blij kalz din. Pa oan yaouank eo bet klañv ma zad. Ma mamm a oa oc'h ober war-dro an ti-feurm hec'h-unan, ne oa ket aes. N'hon doa ket kalz arc'hant ha, da skouer, p'eo bet devet tout ar plouz hag ar foenn eo deuet en un doare naturel an holl amezeien da sikour ac'hanomp. Roet o deus deomp boutelladoù plouz ha foenn. Dalc'het em eus soñj atav rak kavet em eus an dro-spered-se plijus-tre.

Padal n'oc'h ket chomet da labourat en atant ?

Gwir eo. N'on ket chomet. Pa oan krennard hag oadour yaouank em boa c'hoant da vezañ marc'hhouarnar a vicher. Redadegoù marc'h-houarn am eus gounezet pa oan yaouankoc'h. Re a labour a oa en ti-feurm evit pleustriñ gant ar marc'h-houarn, kavet em eus gwel-



Guy Cotten, le soleil sous la pluie gant Claude Ollivier. Embannet gant Ouest-France, 215 p. (18 € an tamm).

Evit gouzout hiroc'h :
WWW.GUYCOTTEN.COM

loc'h klask ul labour all evit gallout redek memes tra. Kavet em eus ul labour beajour-kenwerzh evit un embregerezh dilhad ha goude-se em eus dimezet gant Françoise ha bet hon eus bet div verc'h, Nadine hag Isabelle. C'hoant am boa atav da vezañ marc'hhouarnar a vicher met ar vuhez he deus divizet traoù all evidon ! E Mae 1962 on bet oberataet ha ne'm eus graet kenstrivadeg ebet war-lerc'h. Hiziv an deiz c'hoazh em eus keuz. C'hoant am bije bet d'ober ur sezon evel sportour a-vicher. Ma. A-drugarez d'ar porpant eouliet em eus ar chupenn velen atav !

Penaos eo deuet ur paotr diwar ar maez da grouiñ dilhad evit ar vartoloded ?

Staliet e oamp e Konk-Kerne e-lec'h ma vez ur bern martoloded ha tamm-ha-tamm em eus merzet n'o doa ket kalz a choaz evit o dilhad-labour. Mankout a rae dezho porpantoù eouliet solut hag aes labourat ganto. Kinniget em eus ar mennozh da'm fatrom d'ar mare-se. N'en deus ket kredet er raktres. Setu hon eus divizet gant Françoise mont betek penn memes tra ha krouiñ un embregerezh dilhad amañ e Konk-Kerne. Holl vartoloded Europa a zo gwisket e melen bremañ ! Diouzhtu hon eus dibabet al liv-se evit dilhad ar vartoloded rak pa vez ur barr-avel er mor eo al liv a vez gwelet ar gwellañ. Bremañ e reomp livioù all ivez evel-just da skouer an orañjez evit an dilhad a gasomp d'ar Stadoù Unanet pe c'hoazh al liv gwer evit dilhad al labourerien-douar.

Un dra a zo a-bouez el levr *Guy Cotten, Le soleil sous la pluie* eo ar c'hejadennoù ho peus graet a-hed ho puhez...

Se zo gwir, ur sapre chañs am eus bet. Atav em eus kavet war ma hent tud hag o deus sikouret ac'hanon pe e-keñver an arc'hant pe evit reiñ alioù ha kuzulioù. Da gentañ tout pa glasken arc'hant evit kregiñ gant an atalier. Goulennet em boa gant paotr-al-lizhiri, Pierre Mahé, hag-eñ e anavezze tud a c'helle prestañ arc'hant din. Pebezh souezhadenn eo bet evidon p'en deus prestet din an arc'hant em boa ezhomm. Heptañ ne'm bije ket gallet kregiñ. An aotrou lesanvet La Plume ivez en deus roet din ur velo pa oan bugel, an aotrou Cornic en deus sikouret ac'hanon evit sevel an embregerezh pe c'hoazh Alain Le Quernec en deus treset ar boulomig a zo deuet da vezañ ardamez merk Guy Cotten. E 1974 em boa goulennet digantañ tresañ ul logo. Deuet eo gant ar boulomig a anavezomp bremañ. Er penn kentañ ne oan ket tomm e mod ebet ha lavaret en deus din : "Al logo-mañ az peus ezhomm evit da verk. Klask gantañ ha gwelet e vo". Evel-just e oa ar wirionez gantañ, mat em eus graet selaou anezhañ.

Perak eo bet skrivet raskrid al levr gant Louis Le Pensec ?

Daou zen a oa mat evit sevel ar raskrid Louis Le Pensec pe Georges Pernoud. A-benn ar fin eo bet graet gant Louis Le Pensec. Meur a wech em eus kejet gantañ, dreist-holl pa oa ministr ar mor. N'eo ket un afer politik, traoù heñvel hon eus bevet, n'eo ket ganet en ur familh binvidik kennebeut, plijet omp ni hon-daou gant ar marc'h-houarn hag ouzhpenn-se omp ganet er memes korn bro !

Peseurt sell ho peus hiziv an deiz war ho puhez ?

Marteze e oan ganet evit ober ar pezh am eus graet. Chañs am eus bet da gaout un hent. Morse n'on aet war-gil evel pa vezan en oto, pa fazian hent, gwech ebet ne ran hanter-dro, kenderc'hel a ran hag e kavan un hent all. Em buhez labour eo memes tra, atav ez an war-raok. Chañs am eus bet ivez rak n'on ket bet ma-unan, atav on bet sikouret gant ma gwreg..

75 vloaz oc'h bremañ ha n'emaoc'h ket war ho leve ?

Nann, gwir eo, kenderc'hel a ran da labourat evit an embregerezh. Abaoe 2003 n'on ket mui e penn an embregerezh, laosket em eus ar plas da'm merc'h henañ, Nadine. Mont a ran bemdez c'hoazh da labourat avat. Plijout a ra din kalz ha ne c'hellan ket chom hep ober un dra ben-nak.

Komzoù dastumet gant Joan Bizien